

# SON AR GARANTE BARFET.

Var ton : *Malgré toute la tendresse.*

Laquet eo en hon c'halonou  
An desir d'en em garet,  
Unan demeus hon ezomou  
Eo ar garante barfet ;  
Destinet eo da bep unan,  
Gant eun nez leun a furnez,  
E stad hac e chang er bed-man,  
Darn so contant, darn diez.

O compren gant attention,  
Quement se, hac o selaou  
An ecot demouz ar c'hanton.  
A respont ouz ar moez ou,  
Me m'euz remerquet o tremen,  
Gant eun er gye ha contant  
Dre va c'hich-n eur feumeulen,  
Pini a ra va zourmant.

Pa meus hi goelet o tostat,  
Oun comancet da grenn,  
Bervi a ré ennon va goat,  
Gant an aoun hac ar joa ;  
Quen troublet e oa va speret,  
Quen em boa poan o parlant ;  
Couscoude e meus discleriet  
Evelen va zantimant.

Bonjour dec'h feumeulen charmant,  
Ha dign da vezan caret !  
Mâ ouffec'h o pe santimant  
Emoun me en oc'h andret,  
Ma c'ha fec'h goelet an tourmant  
Ho peus laket em speret,  
E teuffec'h gant empresamant  
Da soulaji va c'hlevet.

Aboë ma meus hoc'h anaveet  
E concevis evidoc'h  
Eun amitie hac eur respet  
Noufe quet beza brassoc'h,  
Ret e ve dec'h beza ingrat,  
Ma na zeud eus ho costez  
Da gavout anoudeguez vat  
A guement a garantez.

*Ar plac'h*

Tavit gant ho complimentanchou  
Hac o fidelite vras  
C'houi o suppos santimanchou  
Na noc'h eus santet biscoas ;  
Rac m'ho pije, a geid amzer  
Evidoun-me concevet  
Eun inclination sincer,  
C'hui o pije din merquet.

*An den Yaouanq*

Merquet e meus dec'h o caren  
Dre va féçon da ober ;  
Honne eo a guella moyen  
Da dremen evit sincer ;  
Mes cresqi a rit va zourmant,  
Dre eun discour quer cruel ;  
Elec'h rai din soulajamant,  
E teuit d'ober din mervel,

*Ar Plac'h.*

Den yaouanq, c'hoi peus preparet  
Evel ma fot ho quentel ;

Mes n'en n'oc'h qet quen resolvet  
D'en em lezel da vervel,  
C'hui a fot dec'h va abusi  
Dre ho comzou stultiet ;  
Ma vent sot aoualc'h d'o credi,  
C'houi c'hoarste var va sujet-

*An Den Yaouanq.*

Plac'h yaouanq, mar qarit sonjal  
E meur boent eus va bue,  
E velfec'h, elec'h godissal,  
E laran ar virione,  
Rac er bep seurt occasion  
E meus roet dec'h da grompren,  
Dre an hirvoud deus vo c'halon,  
Pegement en ho carien.

*Ar plac'h*

N'emeus ho quelet oc'h ober  
Nemet evel meur a hini ;  
Dibot eo ar vras et sincer  
A eller da rancontri :  
Cessit ta d'am importuni,  
Tavit gant hoc'h amitie  
Ha, ne zent mui d'en em vanti.  
Gant ho fos fidelete.

*An Den Yaouanq*

O pebez eun dristidigez !  
O glac'har eri ha c'hoero !  
N'oun qet caret gant ma mestres ;  
Guel e din beza maro  
An eol dirac va daoulagad,  
Ne ro mui a sclerijen  
Ha nemet em bez ne vent mat  
En creis an devalijen !

*Ar Plac'h*

Truez emeus ous ho quelet  
En eur glac'har quer grevus ;  
Ho calon a zo contristet.  
Pe ezoc'h eun den tromplus ;  
Mes ma c'houifen e vec'h sincer,  
Den yaouanq m'ho quemerfe  
Eus vremen da servicher ;  
Marteze me ho carfe

*An Den Yaouanq*

C'hui, va mestrez, c'hui a plij din  
Dreist quement zo er bed-man,  
Na biquen nicun na garin  
Nemet doc'hu hoc'h unan :  
Quittet quittet an douetanq  
Ho c'heus var va c'harante :  
Me en tou dec'h en assuranc  
Biquen nemet doc'h n'am be.

*Ar Plac'h*

Sant Pê en doa de Vest touet  
Enep e adversourien.  
Penos ne vijie qet manquet  
D'he sicour a d'en difen,  
Allas ! ancouat raz e le  
Qent m'en doa ar c'hoc canet ;  
Ar sant en devoa gouscoude  
Teir guech e zianzavet.

*An Den Yaouanq.*

Sant Per en doa dianzavet  
E Vestr ma dirac an oll ;  
C'houi ganen a zo quen caret  
Quen a rafen a c'honrel.  
Dirag an oll dut assembles,  
Me so prest da siscieria  
Penos e c'houi sur va mestres,  
Va fljadur ha va joa.

*Ar Plac'h*

Diganec'h ne c'houlennan get  
E teufec'h da publi  
Ar pez biscoas n'ho c'heus sonjet  
Marteze bete vrema  
Guel e ve ganen et teufec'h  
Dre eur sacrific benac  
Da brouvi din scler em c'harfec'h  
Gant eun intañcion vad.

*An Den Yaouanq.*

Goulen diganen, va mestres,  
Ar sacrific a garet :  
Goulet mar qerit va buez  
Ne viot get refuset  
Nemet ma ellin quent mervel,  
Obten, en creis va zourmant,  
Eus ho compassion eur zell,  
Ractal e varvin contant

*Ar Plac'h*

Den yaouanq, me a meus clevet  
E vec'h eun den variant,  
O c'heus goude beau commançet,  
Toret meur angajmant :  
Birviquen, hac en lavaran,  
Ne recevin eur galon  
Ep obteni ma he allan  
Dre ar guenta donnezon.

*An Den Yaouanq*

Pa form Dour eur feumeulen,  
E crou prest eur par dezi :  
Mes pell e vent, mar en ordren,  
O daou en em rancontri,  
Rac-se eta engajmant.  
Promessa ha amitie,  
Grêt ouz re all, a so neant  
D'an eil evel d'eguile,

*Ar Plac'h*

Breman me vel palant ha scler  
N'ho c'heus quen intañcion  
Nemet da dremen hoc'h amzer,  
Ouz va c'henti va mignoa,  
Abret eta va dilezet,  
Ha retornit adare  
D'an hiai o peus prometet  
Da guenta ho carante.

*An Den Yaouanq*

Va mestres credit a allet  
Ouz hoc'h c'hanavout quentoc'h,  
Va speret na bermetje get  
Carout nicum nemedoc'h :  
Ha mar be ret din separi  
Diouz c'h va c'harante,  
Ampo-zonet gant an annui,  
Ne vo get hir va bue.

*Ar Plac'h*

Re all, avoal'h, zervicher,  
A voe mut ha tourmantet,

Rac brema me anave scler  
Peguement em cherisset.  
Ma meus gret dec'h anduri  
Eun tretamant qer cruel,  
E voa evit oc'h aprouvi  
Ha gout ha c'houi voa fidel.

*An Den Yaouanq.*

O distro leun a garantez  
Hac ar vir gompassion,  
Ha possubl e ve, va mestrez,  
E ve touchet ho calon !  
Beza melus me en esperanc  
Da velet fin d'am poaniou,  
Ha da cedeo ar recompanç  
Demeus va oll hirvoudou ?

*Ar Plac'h.*

Va mignon sec'hit ho taëlou,  
Va zervicher me ho ped,  
Hac en em cherissomp hon daou  
Gant eur garante barfet  
Eus va leurz ho c'heus anduret  
An diveza affliction.  
Espe'ont a ran e teufet  
Da accordi din pardon.

*An Den Yaouanq.*

Evel ma ro ar glis neve  
Ar vue d'ar yeot sec'het,  
Ho comzou a zeu evelse  
Da zoulaji va speret ;  
Dre eun avis quer glaciis,  
Me meus esper da veva,  
Nompas hep qen eun den eürus,  
Mes eun den an eürussa

Ho torn em hiui, va mestrez,  
Ha touomp dirac en Ev.  
Penos e vimp, hed hor buez,  
Fidel an eil d'eguile.  
N'e zonzomp mui en hor glac'har,  
Ne garomp ha ni gavo  
Eur barados var an douar,  
Dre hor pljadrezo.

Var an douar ne n'eus netra  
Quen douç hac an esperanc ;  
Aties e ra mui a joa  
Eget ar guir jouissanç :  
Eur present eo digant Doue  
D'zoulaji an natur :  
Hac e ve hon tromp a rafe  
C'hoas e ra deomp pljadur.

Roue an Ev hac an douar,  
Me anavez ho madelez,  
Hag a rent dec'h enor ha gloar,  
Ha graçou a drugarez ;  
Dec'hu ho c'hunan eo gleet  
D'genta va c'harantez ;  
Goude ze, mer er permetet,  
Ha c'houervin d'am mestrez.

C'houi va Doue, ho c'heus formet,  
Dre eun urz leun a furnez,  
Eva da Adam da bried,  
Hac o laqet assembles ;  
Plijet ganeoc'h Oll-Puissant,  
E ve dia me destinet  
Ar feumeulen man qer charmant,  
Ho peuz gret din da gavet !

Lannion, librairie Mlle DUCHEMIN.